

An Disparti

(f° 47)

Ouman eo an tristidigez a zo kouët em c'halonik
 Fachet eo ma muay karet monet a ha d'an arme
 Va muay karet zo fachet dond a ra d'am dilezel
 Eb ma vouien e neb fesson petra neus bed da ober.

Mar de dre defot madou eo e zit d'an arme
 Kement ma apar[ç]hant ouzin a zo en o liberte.
 bez a meus tregont p'istoll, a va c'hotillon vella
 ag a roin dec'h va chervicher mar kerit chom er vro man.

allas allas ma mestress re divezat e zoc'h deuet.
 e man touchet ar beamant, da Vrest e renker monet,
 Monet a renker da Vrest, pa on e neum enrolllet,
 na da c'houzout pe sort jeu a zo gant ar Spagniolet.

Mond a ra neuze da ti an otruou letanant
 Da kinig dezan kemer arc'hant eur e beamant
 — Dallid, otruou Kabiter, beamant o neus ni touchet
 A rentet dime ar servicher o heus neve enrolllet.

— List o tous dond dan arme ney devo droug ebed
 pa ve dindan kalon an douar e renker e goëlet.
 — allas, ma vec'h evid gouzout ar boan a zo e karet
 ma vec'h e karet aboë ma on c'houi a renkfe kaout ive.

— e kichenik tour sant Loïz, en Vrest var ar flass brassa
 e zgo bed entreze an disparti diveza.
 Ar plac'hik o tond dar ger ne re ken nemed woëlla
 An den e euill an arme sente e c'halonik rana.

7

Julennou, forngueres en taole. 22 fev: 1851. Guinidig a Sibiril.